




9 – Polka : N'eo ket en ho ti (Traditionnel)

Cette polka était chantée par Denise Banniel et Louise Cadic de La Trinité-Langonnet.



N'EO KET EN HO TI

Ce n'est pas dans votre maison

N'eo ket en ho ti tavarnourez
Ma'm oa choazet ma mestrez

Ma'm oa choazet ma mestrez
Ur plac'hig koant ha minorez

Me am oa choazet tostik din
Ar vravañ plac'h, plijout a rae din

Ur vray a blac'h, ur vinorez
Mont a raen d'he gwelet alies

Mont a raen d'he gwelet alies-mat
Gwechoù war varc'h, gwechoù war droad

Gwechoù war varc'h, gwechoù war droad
Me 'c'h a atav d'ur mod bennak

Me 'c'h a atav d'ur mod bennak
Da gas da 'm dous un dra bennak

Da gas da 'm dousig ur prezant
Ur walenn aour pe un arc'hant

Ur walenn aour pe un arc'hant
Pe ur mouchoer lien Holand

Pe ur mouchoer lien Holand
A vo bordet gant neud arc'hant

Gant neud arc'hant e vo bordet
Ar pevar c'horn a vo bokedet

*Ce n'est pas dans votre maison tavernière
Que j'avais choisi ma fiancée*

*J'avais choisi ma fiancée
Une jeune fille jolie et orpheline*

*J'avais choisi tout près de moi
La plus belle fille qui me plaisait*

*Un beau brin de fille, une héritière
J'allais la voir souvent*

*J'allais la voir bien souvent
Parfois à cheval, parfois à pied*

*Parfois à cheval, parfois à pied
Je vais toujours d'une manière quelconque*

*Je vais toujours d'une manière quelconque
Pour apporter à ma douce quelque chose*

*Pour apporter à ma douce un présent
Un anneau d'or ou d'argent*

*Un anneau d'or ou d'argent
Ou un mouchoir en toile de Hollande*

*Ou un mouchoir en toile de Hollande
Qui sera bordé avec du fil d'argent*

*Avec du fil d'argent, il sera bordé
Les quatre coins seront décorés de fleurs*

Ar pevar c'horn a vo bokedet
Bokedoù roz pe violet

Ma savan-me un ti nevez
E vo savet e lein ar menez

E vo savet e lein ar menez
Durc'haet an norioù d'ar c'hreisteiz

Durc'haet an norioù d'ar c'hreisteiz
Hag ar pignon da c'houlou-deiz

Hag ar pignon da c'houlou-deiz
Siminalioù a-blom d'ar c'horre

*Les quatre coins seront décorés de fleurs
Bouquets de roses ou de violettes*

*Si je me construis une maison neuve
Elle sera construite au sommet de la montagne*

*Elle sera construite au sommet de la montagne
Les portes exposées au midi*

*Les portes exposées au midi
Et le pignon à l'aube*

*Et le pignon à l'aube
Les cheminées à l'aplomb du levant.*

